

Tredrez.

Na ma plich ganech e chilleofet
 Eur wers ^{neve} à zo kompozet
 dar plac'hik yaouank e vond dar ieodet.

Pa voa o vond gant an hent bras
 Daou kavalier ~~yaouank~~ a rankontras
 Merc'hik iaouank din e leret
 Pelec'h e het na mar gorc'h bed

Deus ar ger eo e deuan
 Dar bardon ar ieodet eo e han
 me ia dar pardon dar ieodet
 mar les doue anon da vonet
 da kovessat da communia
 da c'hounid ar pardon mar gallan.
 Merc'hic yaouank din e leret
 mar no cheus kompagninez ebed
 me a meus kompagninez awoalc'h
 Me da evan dour evoan arretet
 Ma chompagninez zo poursuivet
 Mar dallean me vo kortoet

Ar pac'h bian pa voellas
 Divoar kein e marc'h a diskenas
 a vriad er plac'h iaouank e he groguet
 Var gein eur marc'h deus y laket
 eur vouchouar guen dour empezet
 deus e c'hodel e deus an denet
 da lakad war visach ar verc'h iaouank
 wid na viche ked anaveet
 gant an dud o vont dar ieodet

ar verc'h yaouank a irvoude
 a na devoa den er c'honsolche
 Nemert ar palefrinier henez a re
 henez e c'holsole av oi jo
 en evoa true ous e c'hanvo
 ar verchik iaouank a lavare
 en Coattrede pan' arrie
 na reit din kadeur da assean

mar m'be me an itron deus an ti man
 ar gouarnerez a respontas
 dar vechik iaouank pan hén klevas
 Itron deus an ti man na veet ked
 Nemert ewid kortos eun all da doned
 Gouarnerez na n'em c'hered
 beet ewidon avocadez
 beet ewidon avocadez vad
 mar kouskomp on diou en eur goelead
 c'hwi ne noc'h ked deuet da tredre
 ewid kousket ganin me
 c'hwi zo groet o koelle (en) eur kabinet
 a gant an otro tredre a kouskfet
 An otro tredre a lavare
 dar verc'hig iaouank ag an eur ze
 Merc'hig iaouank ma nem c'heret
 ganin dar jardin a deufet
 da choas eur boket a louzou fin

deus a cherfil douç ag a turkantin
 Otro tredre mar nem c'heret
 Plac'h ar bokejo me nan on ked
 mes me iel ganech pa disirfet.
 ebars er jardin pa e entreet
 ar verc'hik iaouank a neus laret
 An itron varia a vulat
 da gonzolo ma mam a ma zad
 Doue da gonzolo ane
 Birwiaken gante dar guer na arrian me
 Ma pa deus choazet e boket
 e gontel deus an otro e deus goulet
 otro tredre mar no nan(1) c'heret
 o kontel din en prest e roftet(2)
 na da grena dreid ma bokejo
 na dikenont ked eum godello

Merc'hig yaouank ma excuset
 Potr ar c'hontello me na non ked
 ma fognet arc'hant a po pa guerfet

er pognet arc'hant pa e kroguet
 ar verchik iaouank an neus laret,
 diganec'h ma Jezuz a c'houlenan

pe me non lac'h pe me na ran
 nag a balamour dac'h goe(r)c'hes vari
 na c'houlenan ked o offanci

pa e disroet an otro en dro
 e voa ar verc'h yaouank var e geno
 nas pe chonch a jesus en o galon
 Chwi a verc'h en eur goal intention
 penervet daoni ma ine
 na woarc'h ked ed goe(r)c'h dirag Doue.

An otro tredre a lavare
 d oll dud e di ag an eur ze
 Oll dud ma zi ed da kousket
 Pel e an noz poent e monet —
 ar gouarnerez a respontas
 Dan otro tredre pa en klevoas
 Nen n'eus cherwicher en o ti
 Na voar o nosvez koulz a c'hwi
 Mar a weac'h a moa o blamet
 ag a balamour dar merchet
 ispicial onez ewid ar muan
 C'hoar vager an otro k/nenan
 — a lakeio o koad da ienan.

Oll dud ma zi nam diskuillet ked
 Peb a kant skoet dec'h a vo roet
 — me a sonno dei ar c'has tanno
 en chapell tredre me in enterro
 Ne voa ked kanet ar chigi dan de
 e voa torret ar perjer en tredre
 na gant an otro Kernenan
 ag anter kant soudard gantan

Trede
 na bonjour a laran en tredre
 na ne man ked an otro er guer
 ar palafrinier pa klevas
 en traou gant ar vins e tiskenas
 eis de zo e tremenet a boe en tredre ne loget

Gaou e lerez palafrinier
 Pa out er guer e man ie
 te zo kustum da vond gantan
 woar an incho bras da plac'hetan

ma c'hoar mager aman rankan da kad
 en beo pe en maro
 pe me lachei an tan en tredre
 a buhe an otro am m'o fete

An otro tredre pan' neus klewet
 en draou gant ar vins e diskenet
 les ganin ma buhe emean
 me rei dec'h ma rent a ma leve

Na ne ked ta rent a ta leuve
 a fell din
 ne ne ta choar mager a klaskan
 a klevan laret a zo aman
 a buhe wid buhe à houlenan.

Au f. 175 recto, il n'y a seulement qu'un titre, écrit à l'encre bleue :
Koattredrez.

- (1) C'est ainsi que je lis ces deux mots no man : n'em.
 (2) Ms. roftet ou peut-être roffet.